


Breman 8, ru HOCHE 35000 ROAZON

12 lvs

bremañ

DU 1988 Niv. 86

**GWENED
SADORN 26 A VIZ DU
MANIFESTIN
ADAL 3 EUR**



EVIT AN DEUG

LIZHIRI

War ma distro eus an Iwerzhon, e-lec'h m'am eus tremenet tost da c'haec'h mis, e kavan ur bern kelaouennou oush ma gortoz, en o souez niverennou eus Bremañ; Kommanantet on bet abaoe pell 'so d'ar gelaouenn-se a gavan talvoudus-tre dre vras.

N'am eus ket bet amser c'hoazh da lenn pep tra, met war bajenn sivezhañ an niverenn 85 e lenn ar pennad "Mesk-Divesk" notennou gant Garan ar Meur a gavan dispilijus meurbet ha feukus-tre d'am c'hredennoù kristen. N'eus ar skrid-se netra a sell oush Breizh e gwirionez, nemet un dilennad "lec'h ma tiskouez Garan bezañ laouen-ran o welout niver ar velenen o tigreksif en eskopti Roazon." Ar peurrest n'eus anezhañ nemet tagadennoù feuls enep an iliz katolik hag ar gris-tenelezh. Ar gvir en deus Garan ar Meur, evel-just, da gaout ar memmosioù a blij dezhañ; met d'am memo BREMAN a die chom war dachenn ar stourm evit Breizh hag he yezh, war dachenn ar savioù rak d'hoñ hini er broioù all, gant keleier ar-zidout ar pezh a veer e lec'h all war an hevelep tachen. Ha setu perak on kommanantet da VREMAN, ha tamm ebet evit lenn pennadoù droch Garan. Ma fell dezhañ kregiñ gant ur stourm evit mennoziou dizoue ha difeiz, kement-se a zo e wir strizhañ, met n'eus n'en deus nemet sevel ur gelaouenn evit-se a c'hellfe envel "d'am traon gant ar galotenn" pe evit da vare an tadj Combes; met neuse evel-just ne vefen ket e-touez kommanterien ur seurt kelaouenn. Ur bloavezh dennek pe saou a zo, em boa bet digarez da glemm dre ma oa bet moulet war VREMAN un dresadenn feukus gant ar Gall Planchu a-enep ar Fab, a oa dafjerus da gristenien an emsav, zoken ma n'int ket re figus.

Gant tristidigezh eo e chomfen hep adkomantit da VREMAN; met hen ober a rin, a dra eur, ma kendalc'h Garan ar Meur gant e abotelerzh digristen e pajemoù ho kelaouenn. Respontit din, aotrou Rener, war ar poent-se, mar plij ganeoc'h. Goude bezañ tremenet ma buhez o stourm evit ma bro, e kavan mantus kaout da c'houzañ ur hevelep emsalc'h diemagariuz a-berañ war eus kelaouennou gredusañ eus hon emsav.

Din-me da vesañ kommanantet d'ho kasetenn e c'hellan lavarout deoc'h es on bet bepred plijet d'ha lenn bep mis, a-bep seurt a ves kavet emi ha se a blij din.

N'on ket evit mont d'an oferm bep mis pe bep sul zoken, kristen on bet 'giz lod vrasañ tud ar vro-mañ, desavet, e-giz ma vevgraet gwechall, er relijion degaset d'ar Vretonad meur a gant ulloz so. Setu pell zo em eus pellast ha dibabet un hent all evit va spered. Hini an dieubidigezh da zibab penaos ren e vuhez. Ne blij ket din degemeret gouc'hemen-mañ gouc'h'emenn. Gour awalc'h omp evit gwelout ar pezh a zo mat evit

Emenn o vont da gontañ deoc'h ar pezh a zo bet c'hoarvezet ganin evit enkritvadurioù Skol-Veur Roazon II.

Evel-just, evit bezañ enskrivet eo ret leuniañ ur bern paperoù evel na oust; paperoù leuniet bet gwech dija rak emenn em pevarvet bloavezh. Memestra em eus kroget gant al labour: lec'h ganeidigezh "Kemper, Broadelezh: Breizhek.

Goude bezañ bet leuniet ar paperoù on tremenet dirak div blac'h: netra nemeg. Tremennet on neuse dirak ur plac'h eus Ero ar Vagreb ret dezhi adskrivañ an disklariadurioù war an urzhiaetaer. Neuse: Ar plao'h: n'oe'h ket ganet e "Quimper"? Me: eo, met skrivet em eus e Brezhoneg. Hi: Brezhoneg, petra eo se! Me: O tieplegañ...! c'est mon droit!... Hi: Ah oui, Le droit à la comédie! Me: O tieplegañ en-dro. Hi: o kenderc'hel gant ar follem hag o c'hoarzhin forzh pegement. "Nationalité bretonne, qu'est ce que c'est que cela, n'importe quoi...!" Me: n'importe c'hoazh. Hi: (tost da vervel gant ar c'hoarzh) o lavaret d'he mignones: gwel't peus! Broadelezh Breizhek! n'eus forzh petra.

Hag he mignones o respont "Ben ya, ha neuse, me ivez a zo Breizhades!" Hag an hini all o serrif he beg hag o paskrivañ war he urzhiaetaer: "Nationalité Bretonne!"

Ganeoc'h a galon, Raymond Delaporte

LIZHIRI

an den a soñj din.

Met feuket on bet gant pennadoù Garan ar Meur war BREMAN mis Here, ne zegas netra randoñ memestra war tonnoù disheñvel. Targañ pe mouget ne zegas netra; ar c'hoatrol vefe mañ rak pajenn MESK-DIVESK a blij din gwech ha gwech met targañ n'hell degas netra awat; dieubidigezh an den a ves dre souzjañ oush e vennochioù a gant din gant ma n'int ket evit lazhañ...

Gwellañ gouc'h'emenn da dud ar gasetenn,

P. Al Louec'h

Aotrou Rener, Boas e vesañ da bremañ ho kasetenn pa dremenet dre stal Breizh. Ha soñjal a raen e vefe un dra vat kommanantit rak plijus tre e kavan ar pezh a embarnit. Met me so ohalet bras gant ar pezh a skriv Garan ar Meur. N'eo ket ur wech met tost da vat bep gwech. Perak kement a gasont enep ar relijion? Pep hini zo libr da soñjal ar pezh a gar met kristenien zo kommanantet da VREMAN emichañs ha sur, n'eo ket brav dezho bezañ diemagariuz ingal e-mod-se. Het eo deoc'h kompren an dra-se.

N'eo ket kalonek an aotrou-se pa n'hell ket sijnat e wir anv, rak me gred eo ul lezenn. Ha tino e anv evit ma so gouezet piv eo. Triet on eo trawalc'h gant un den evit lakaat eac'h-blev da ven. Gwelloc'h zo d'ober.

Gant va gouc'h'emenn, Anna Rohou

RESPONT DA LIZHIRI LENNERIEN BREMAN

Diaesat trevell respont da gemend all a lizhiri! Hag ansav a ran ne oa ket plas embann an holl anezho!! Sachañ a reont holl hon evezh war bal ar gelaouenn "BREMAN" e gwirionez. A-du e savan gant R. Delaporte da skouer, pa glask teraññ roll ar gelaouenn, met estreget an dra-se a garfen kavet e "BREMAN". Keleier da zedennañ ar Vrezhonegerien evel tud o vevañ en ur gevredigezh a zo ledanoc'h evit tiricenn Breizh zoken. Ur gelaouenn vizek n'he deus ket da astomañ boued bet serrijet betek gualc'h he lennerien gant dardreñ-kelaouif prisoùc'h kennebeut...

Hag he mignones o respont "Ben ya, ha neuse, me ivez a zo Breizhades!"

Hag an hini all o serrif he beg hag o paskrivañ war he urzhiaetaer: "Nationalité Bretonne!"

Jakez Fulup


Met lakaomp ar gaos war bennadoù Garan ar Meur pa 'z eo an dra-se penn-abeg ar bajennad er gelaouenn ha zoken pa ne den -mont ket da Vreizh na da stourm-ou an Em sav o devez un interrest. Meur a hini en deus anza-rest. Meur a hini en deus anza-rest. Meur a hini en deus anza-rest. Meur a hini en deus anza-rest.

Ma lammer betek pennad diwezhañ ar gelaouenn, a-raok bezañ lennet ar peurrest eo peo -gair e kaver dudi o lenn ar bajennad-se zoken pa ouezer e c'heller bezañ feuket gwech ha gwech all. Ne lavarint ket ne vez mouset a randonenn gantañ. -Ra zigarezo ac'hanon- met lod kement oberour 'zo, an hini eo, kaout prantadoù ma vezer dornet kaer ha re all ma vezer skui-zhoc'h ha pommeroc'h e zorn. Kiriek eo Garan ar Meur eus e bennadoù ha ne soñj ket din eo ma roll troc'hañ war e skridoù.

Ansav a ran koulskoude e oan chomet etre daou ar miz tremenet pa'm boa lennet MESK-DIVESK. Ne oan ket o c'hortoz an dra-se. Ur pennad a rank kaout un abeg dezhañ ha ma oa ken feukus Garan ar Meur ar miz tremenet eo dres, peogwir en deus bet taget evit e blijadur dezhañ tra ken hep na vefe gwir -abeg e bennad.

MANIFESTADEG

DEUG DIFONN



SADORN 26 A VIZ DU

Abaoe tost 4 bloaz emamp o c'houlenn krouidigezh an DEUG BREZHONEG, Skouarn -vouzar e vez graet gant ministred an Deskadurezh. Ne c'hellomp ket gortoz muioc'h. An arnodenn-se a zle bezañ savet er bloaz-mañ, evit ma vo stummet, a-benn miz Gwengolo 1989, ar vistri-skol hag ar gelennerien brezhoneg a ra diouer kenañ en Deskadurezh.

Evit sachañ evezh ar galoud e vo graet ur vanifestadeg "D.E.U.G. DIFONN" e SARNED d'ar Sadorn 26 a Viz Du 1988, da 3 eur hanter resis (al loc'hañ).

Gant kirri e vo graet. En em gavout a raimp e karter Me-

nez-Neur ("Ménimur"), lec'hiet just war vord ar gour-hent MAONED-AN ORIENT, e-kichen ti ar Greizenn Sokial. Panelloù "Vanez-Ménimur" zo war vord ar gour-hent; ganeomp e vo lakaet ouzhpenn panelloù "D.E.U.G. BREZHONEG", gant biroù, evit hoc'h hentañ.

Kempennet e vo ho kirri evit ma vefe goulet ez eo ur vanifestadeg evit an D.E.U.G. BREZHONEG, gant "c'hwizigelloù" "DEUG Brezhoneg!", tresadennoù NONO, panelloù, gitonoù, ban-nieloù, hag all... savet diwar hoc'h ijin. DEUIT NIVERUS!

Burev Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg.

KORSIKA


FELICE TOMASI DIEUBET

Goude 5 bloaz ha 7 miz en toullou-bac'h gall eo bet barnet Felice Tomasi ha Charles Piri evit bezañ keme-ret perzh e 1982 en arsañh ur c'hamp leijonerien e Korsika. Prouenn ebet ne oa a-enep dezho ha lezet eo bet Felice Tomasi da vont. Enañ Piri o c'hortoz en toull ur prosez all.

Mikael BAUDU

LIZHIRI

Hè vultatu Felice!



Hè vultatu Felice!

bremañ 2

bremañ 3

DIGORADUR OFISIEL SKOLAJ ROPARZ HEMON



ha, tamm pe damm, o komz evel dileuriad Kevrenn Geltaek Skol Veur Roazon e oa roll ar Skol-Veur klask sevel danvez hag ober enklaskoù evit diorredur ar Vro e-lec'h n'emañ.

An dud e karg a oa deut o deus hetet chañs vat d'ar skolaj bihan. Roger Le Prohon, kuzulier Rannvro, Alphonse Arzel, an aotrou Kervella Meur Kastell Paol. An aotrou Berthelet, bet maer Brest, en anv ar c'huzul-ker en deus lavaret e oa poent soñjal da glask ul lec'h brasoc'h evit respont da gresk niver ar vugale. Jean-Yves Cozan en deus prometet e vefe savet ur skolaj nevez penn-da-benn ma ne oa diskoulm all ebet. Fiziñs en deus e barregezh pedagogel izili DIWAN.

"Porsh peseurt gouarnamant a vo e penn" emezañ, "e vo dav derec'hel da stourm evit difenn hor personelezh. Met pa vezan en aiaestriou e ranker stagañ e arar ouz ur steredenn".

Hag a-hend-all, a-hed an devezh ez eo bet digoret ar skolaj da gerent Diwan, d'ar skolidi da zont, ha d'an holl dud ; en o zouez personelezhioù ar vuhez sevenadurel hag ensavelezh evl Ronan Huon, Armand Kervel, Kristian Brisson, an aotrou Desbordes... a zo bet gwelet.

T.L.

D'ar Sadorn 4 a viz Du 88 eo bet digoret en un doare ofisiel Skolaj Diwan "Roparz Hemon". Lavaret eo bet gant ar renerez Pascale Chevillard hag ivez gant dileuriad ar skolidi, Katell, pegen plijet e ont da labourat e brezhoneg en ur c'hwec'hvet klas a oa bet prientet ken mat en-raok.

Andre Lavanant, Prezidant Diwan, en deus trugarekaet, da gentañ, an holl re o deus laekaet ar mennad-se da zont da wir : ar skipailhoù pedagogel eveljust e-lec'h ma 'z eus bet ouzhpenn hanter-kant a dud o labourat kalz pe nebeut ; an dud e karg, ar c'huzul Meur hag an Aotrou Cozan eil prezidant ar c'huzul, Ti-ker Brest hag ar c'hengredad kerel o deus graet war-dro pourchas al lojeiz, lakaat anezhañ a-ratre ha war-dro ar c'hudennoù teknik.

Lukian Kergoat, rener ar bodadoù pedagogel, en deus displeget peseurt raktres pedagogel a oa : mont buan war-du implij un trede yezh, ar saozneg, evit deskiñ danvezioù all ; ar program ofisiel a vez heuliet, met kompennet un tamm evit derec'hel kont eus en-dro Breizh ; ar prantadoù kelenn ne reont nemet 45 munuten evit klotañ gwelloc'h gant evezhiusted ar grennarded yaouank.

Pouezet en deus Lukian Kergoat war an enklaskoù a zo bet evit dibab ar gerioù a oa ezhomm da sevel ar c'hentelioù. Rak, mankoù a oa e gwirionez er yezh skiantel. Ret eo bet klask chom hep mont gant hent ur c'hlanvezhouriezh dañjerus, na kennebeut kouezhañ en amprestadennoù dibabouez d'ar galleg. Ul labour reizhekaat a oa d'ober evit kaout ur geriaoueg resis. "Hentenn Roparz Hemon eo a zo bet dibabet" eme penn ar skipailhoù pedagogel. Lavaret en deus ouzhpenn-se, evel kelennerezh



F.R.3 PE GWALLHUÑVRE MIKAEEL

E niverenn diwezhañ AL LIAMM (Gwengolo-Here 88), en ur pennad "diwar-benn abadennoù brezhonek ar skinwel" e ra Mikael TREGER tri goulenn (en-krezet) :

"Daoust hag e ves sellet pe get ouz an abadennoù brezhonek gant ar vrezhonegerien desket (ar re a lemm hor yezh)?"

"Ma ne reont ket, daoust hag eñ ez eo peogwir o c'havont fall pe peogwir ne sellont mor-se ouz abaden tele ebet, pe c'hallek pe vrezhonek e ve?"

"M'o c'havont fall, petra o di'e o'hoant da gavout e-barzh ? D'avez daoust pe d'avez fetioec'h ? Mar-plij, respontit emezañ."

Morc'hed am befe o lezel e c'halv direspont. N'em eus ket c'hoant e hunvrefe ken ne oa nemet un nebeud kelien o sellet ouz e filmoù brezhoneg en tele tra ma oa an holl dud o vanifestiñ er-maez evit ma vije muioc'h a abadennoù brezhonek er skinwel ! Daoust ma n'eo ket ken aes-se respont d'ar goulennnoù ma n'eo ket diwir penn da benn kennebeut ar pezh a wel Mikael en e hunvrefe.

Meur a wech ez eus bet soñjet ober gwir vurutellerezh skinwel e-barzh "BREMAN". N'eo ket bet graet da vat. Hag un diouer amat a zo aze.

Respontomp da gentañ.

Evidon-me, "brezhoneger desket" eta e sellan ingal ouz an abadennoù brezhonek er skinwel. Pa vezan er gêr da nebeutañ da lavaret er gêr wech war deir dre vras. Met aesoc'h din gwelet "Chadenn ar Vro" d'ar Sul eget "An Taol Lagad" d'ar Sadorn, rak aliesoc'h e vezan en diavaez d'ar Sadorn.


AN TAOL LAGAD DA GENTAN

Muioc'h e plij din koul-skoude "An Taol Lagad" dre vras. Meur a abeg a zo. An danvez a blij din peogwir e tiskouezer darvoudoù ar vro, e weler buhez

ar Vretoned hag ar vrezhonegerien, o c'hudennoù, ar pezh a reont, ar pezh a soñjont. D'am soñj eo deut a-benn Fanch Broudig da dapout un taol-micher a ra c'hoazh diouer da veur a hini. Hag ar vicher-se a zo ivez dont a-benn, mat a-walc'h benn ar fin, da ober ur seurt pont etre ar "vrezhonegerien desket" hag ar vrezhonegerien voutin. Ingale eo ivez an danvez ha peur-vuiañ n'eus na kerse na souezhadenn ebet.

CHADENN AR VRO

Dizingaloc'h eo "Chadenn ar Vro", ha n'heller ket barn an abadennoù dre vras. Liesseurt int e gwirionez. Hag e pep rumad abadennoù ez eus liveoù dishevel. Ne choman ket plantet dirak ar post-tele, na peurrest ar tiegezh, eus kreisteiz betek un eur d'abardaez. War enaou e-ma ar post ha diouz ar pezh e zo e sellomp a dostoc'h. Ar vugale a chom paret o daoulagad war-du ar skramm evit Yakeri pe evit troioù kamm ar Paotr Marsel, evel o c'herent. An holl a ra peoc'h ivez pa vez mare ar c'hoari koulz pa oa ret kavout un den brudet ha bremañ evit ar gizioù kozh : ar blijadur da glask eo, rak ral a wech eo deomp kas ur gartenn-bost.



Da zeiz ar 6 a viz Du eo bet kinniget deomp "Tasmant an Noz", ur film-faltazi a dalv dreist-holl dre ma 'z eo di-c'hortoz an istor. Ar penn-aktour, Jorj Jouin n'en em zibab ket fall daoust d'ur pouez-mouez iskis un tamm. N'eo ket gwall naturel avat c'hoari ar bras eus an aktourien all. MELEZOUR BREIZH diouz e du a ginig deomp dielloù filmet eus Breizh gwechall, ha n'eo ket displejuz en holl daoust da chom gwall unton : n'eo ket buhez-tre doare kinnig Sylvain Kernea.

KEHEIER, DIDU HA FALTAZI

Petra lakaat neuze en abadennoù brezhoneg, teir lodenn a zo : hini ar c'heleier dre vras, an diduñ hag ar faltazi. D'am soñj e tefe al lodenn vrasañ bezañ gant ar c'heleier : darvoudoù, kudennoù ar vro hag an estrenvro, rentoù kont spor-tel evel ar racthoù fobal pe all, breutadegoù politikel evel ma 'z eus a-wechoù da geñver ar votadegoù, abadennoù diwar-benn kudennoù an amzer a-vremañ (satrodrad, laezh, labour, teknologiezh, skiant, medisinerzh.)

EN DIDUÑ E LAKAN ABADENNOÙ KAN, SONEREZH, ABADENNOÙ EVIT AR VUGALE, FENTIGELLEREZH.

Erfin, ar faltazi n'eus ket ezhomm e vefe gantañ ur plas bras-tre : daou zoare a zo da gaut : filmoù berf da heul (feuilleton) evit diduñ hep re a breder hag a-hend-all filmoù dezho un awen hag un enklask brasoc'h.

DRE AR BED

ISRAEL

Hervez an ajañs Reuter e vije bet savet "Skouadro-noù an Ankou", evel e Brazil hag Arc'hantina gwechall, da lazhañ ar re a vefe e penn an "intifada" e Sisjordania hag e Gaza, kalzig skouerioù a dud e yaouank lazhet a zo bet hag a gazetennerien gwallgaset ha gourdouzet evit reiñ kred d'ar c'heloù-se.

BRAZIL

Nac'het en deus barner ul lez eus Belem selouo daou penn-meuridi indian eus Amazonia peogwir ne oant ket gwisket en un doare "sevennet", hanter nozh ma oant gant o di-lhad ordinal. Tamallet e oa delha dezhañ "divrudet Brazil" pa oant bet er Stadoù Unanet da ziskuliañ ar raktresoù kreizennoù dourfreadan en o bro. ■

POLSKA

N'en deus ket gouzañvet Jarulowski an tagadennoù a-enep dezhañ er c'hazetennoù saoz war zigarez ne fell ket dezhañ anavezout ar sindikad Solidarnosc ha divizout gantañ, "Ma ran nemet evel an i-tron Thatcher", en deus diskleriet ar jeneral, "Hag e kavont se mat evit Bro-Saoz". Gortoz a reer "Bro-C'hall d'ar Sul" da c'houzout hiroc'h diwar-benn karantezioù an daou jeneral-mañ. ■

KANAKY

Ma lennit "Mourir à Ouvea" gant Plenel ha Rollat (La Découverte-Le Monde) e teskooc'h, ma ne ouieoc'h ket c'hoazh, e oa bet lazhet 15 eus 19 Kanak marv gant tennoù en o fenn. Meur a hini anezho a oa bev pa oant bet tapet gant an arme c'hall. Ur vech lezel da embann seurt levrioù a bulloc'h ar pezh a chom eus enor an arme. ■



UR C'HUZUL BREIZHAT A-ENEP AN URANIOM

D'an 19 a viz Du e vo bodet e Pondi an holl guzuliou-lec'hel a-enep an uraniom da sevel ur c'huzul breizhat evit efedusaat an obererezh. C'hwitet eo bet ar stourm ouz ar c'h-CEGEMA e Buri dre ziouer a liammoù hag a unaniezh etre ar c'huzuliou-lec'hel, eme prezidant Kuzul Buri.

Kaoz zo ganto da sevel ur manifestadeg vras e Pondi. An deiz a vo laket goude o bodadeg veur.

D'an 31 a viz Kerzu : FEST NOZ a-enep an Uranium e Groñvel. ■

Ederoù miz Du ez eus bet kinniget daou gelfilm gant TF1 diwar-benn ETA, gwelet int bet gant milionoù a dud. An hini kentañ a ziskoueze levnezh Madrid goude dieubidigezh an Ao. Revilha. An eil a ziskoueze div vaouez o klemm : o friedoù, CRSED anezho, a oa bet lazhet gant ETA hag int n'o doa ket bet argant (awalc'h) c'hoazh.

Ur pennad a zo bet gouestlet d'ar jahinerezh e Bro-Spagn. Embannet e oa bet gant Ouest-France Kemper, pajenn Douarnenez. Lennet eo bet gant un drederenn eus Bro-Gerne. ■

P.A.M.

BERR HA BERR

Lennet em eus e kazetenn ofisiel ar republik gall (J.O.) d'an 19.9.1988 "Gouenn dre skrid niv.2460 kaset d'an 19.9.88 da Brezidant ar Parlament ("Assemblée Nationale") :

An Ao. Michel PELCHAT a c'houlenn digant an ta-Ministr, lakaet dindan Ministr-Stad an Aferioù Betren ha kaset eus ar gallegiñ, petra a soñj-er diwar-benn diorren ar yezhoù ouzet rannvroel e-barzh tiriadoù tramor ar republik gall ("T.G.M.") dreist-holl er Mor Habak : daoust hag an diorren-se ne vo ket nozh ozh skignerezh hor yezh ("notre langue") er c'horntioù-se eus ar bed ?

Kannad an Esonne er Parlamant eo Michel PELCHAT (hag ouzhpenn kuzulier kanton GIL-SUR-VLETTE, bet dilennet e 85); eus an tu dehoù eo, RPR a gav din.

Souezhet-bras e vefe marvat o welout e c'houlenn lakaet en ur yezh "rannvroel" (zoken ma n'eo ket unan eus Mor Habak !).

Petra a responto is-Ministr ar gallegiñ ? Daoust hag e kredo e gwirionez ez eus un dazont bennak evit ar galleg er c'horn-se eus ar bed ken pouezus enañ ar broioù saozneg (S.U.A., Aostralia, Zelandia Nevez...) ?

B.Kadored

REAJ DA VRO AR SORABED

Gant Kevrenn Penn-ar-Bed ar Gwredigezh "France-RDA" (Bro-C'hall-Republik Demokratel Alamagn) e vez asoet bep bloaz da vare Pask ur veaj da Alamagn ar Reter. Ar bloaz-mañ e yelo an dud da weladenniñ rannvro Cottbus ma vev enni pobl ar Sorabed, ur bobl vihan a gomz ur yezh slavek. Ur mis e pado ar veaj-se, eus ar 26 a viz Meurzh d'ar 25 a viz Ebrel 1989 ha ne gousto nemet 2300 lur gall.

Evit kaout mmoic'h a di-touroù skrivañ da "France-RDA", 18 straed Kerzu Vihan, 29200 Brest pe bellgomz d'an niverenn 08.02.73.84. ■

KARTA EUROPA

UR BENVEG OUZHPENN EVIT DIFENN AR YEZHOU GWASKET

MARV EVIT IRAK

Soudarded eus Kamp Lande d'Ouvé, e Sant Albin an Hiliber, a oa bet lazhet en Irak e 1985, o c'hoari gant kanolioù-brezel, hon eus desket er c'hazetennoù gall nevez zo.

Desket hon eus ivez e oa bet soudarded ha kirri-nij eus Landivizio o'n em gannañ eno ivez marvat, o teskiñ da Irakiz penaos ober gant o c'hoarielloù brepred. Ha gant ar gaz ivez ?

Ansoudegezh vat o devo Murded Irak ouzh Bro-C'hall hag he c'hentelioù a-zivout Gwriou Mab-Den : heptu ne vije ket bet ken efedus bombez Saddam Hussein a gouzhe war o fenn!

War var da vezañ gwall saotret eo bet pleg-mor Brest nevez 'zo. Ur vago-dougen-gwin he deus stoket ouzh ul lest-brezel p'edo o vont er-maez. Dre ma oa bet goulonderet ar vag neubet amzer a-raok, n'eo ket bet mezvet ar besked ... !

T.G.

K

ejet hon eus evit "BREMANN" gant Luis Mari de Puig, depute Katalan e Madrid hag a labour e Kuzul Europa. Kemeret en deus perzh er strollad labour en deus prientet ha kinniget "Karta Europa ar Yezhoù Rannvroel hag Etnikel". Div bazenn zo bet tremenet dija gant ar skrid diazez-se : votet eo bet d'ar 17 a viz Meurzh gant Dael ar Gallouduh Lec'hel ha Rannvroel ha d'ar 4 a viz here gant Bodad Kannaded Kuzul Europa. Chom a ra bremañ d'ar garta bezañ asantet gant un drederenn eus Kuzul ar Vinistred an 22 vro a-raok bezañ kinniget da sinadur ar stadoù ha bezañ lakaet da "Englev Etrevroadel".

Bremañ Petra eo ar pep pouezusañ er garta ?

L.M.de Puig Ar pep pouezusañ eo e vefe bet diazezet gwriou an dud a gomz ur yezh gwasket war ziazez ar broioù. Met taburet ez eus bet kalz. E penn kentañ ez felle deomp e vefe enno an "Digoll Istorel" hag se n'eo ket bet dalc'het. Ar pep reañ evit ar stadoù zo bet miret koulskoude, n'eo ket bet cheñchet spered ar garta. A-bouez

eo dreist-holl ar skrid evit ar minorelezhioù gwasket ar muiañ.

Bremañ War besawt tachenn e pled ar garta ?

L.M.de P. War tachenn ar gwir e-keñver ar pezh a zo da ober er vuhez foran, er marezh, el lezioù barn, er media, en obererezh sevenadurel, ekonomikel ha sokial, en deskadurezh.

Bremañ Daoust hag eñ ho peus spi e vo degemeret da vat ?

L.M.de P. Ya, emichañs e vo kavet 7 stad prest da votañ war 22 warn'ugent ha war lec'h e vo ret pouezañ war pep stad en dro pa vo digor an "englev" d'ar sinaturioù.

Evit klozañ Luis Mari de Puig en deus diskleriet deomp e soñje dezhañ e vefe studiet e miz Meurzh pe e miz Ebrel gant Kuzul ar Vinistred.

A.V.C.

Notenn : tu zo da gaout testenn ar garta e servij kazetennerezh Kuzul Europa-Strasbourg-

FRANKIZ BREIZH

Savet eo bet al laurenn bolitikel FRANKIZ-BREIZH evit respont da c'houlenn un nebeud bretoned kar-o-bro a nac'he bezañ klozet e kellouigoù ar strolladoù hengounel o fram.

D'ar Sul 16 a viz Here 88 e oa galvet hec'h izili d'en em vodañ e Brest evit prederiañ a-gevret war balioù o c'hevredigezh.

Gouestlet e voe ar min-tinvezh da testeni an dud a ra rezhek, sevenadurel ha sokial e Breizh. Goude an diviz diwar efed o labour e teuas anat d'an ekonomikel ar Vretoned en o hê-rezh vroadel hag e oa efedu-

soc'h ar c'henstriv evit sevel ensavadurioù nevez evel DIWAN, STUMDI pe al labourvaou emvret, eget ar stourm evit pignat gant derezioù ar stad.

War-lerc'h pakañ merenn, e savas kaoz kenetre izili FRANKIZ-BREIZH a-zivout dek kinnig evit dazont ar vro.

1. Ober eus spered-bro ar Vretoned, diaz pennañ an oberoù politikel, sevenadurel hag ekonomikel.

2. En em harpañ war an hê-rezh vroadel evit diorren Breizh

3. Resturel d'ar Vretoned stur o zonkad dre zigreizenniñ ar galloud.

4. Kenderc'hel kousto pe gousto, da c'houlenn groñs an

doujañs evit ar gwriou sokial.

5. Kemerezh eus kenskoazell etrevroadel ar pobloù o stourm.

6. Merañ an endro gant e-vezh.

7. Ober gant ar Brezhoneg.


8. Digeriñ ar geoded vreizhek war ar bed-holl.

9. Reiñ lañs d'ur vuhez kevredigezhel breizhek emren.

10. Skoulmañ darempredoù stank etre Breizh hag holl-Vroioù Europa.

A-du evit tizhout ar memes palioù, ez eas izili FRANKIZ-BREIZH pep hini war e du evit embregañ ar c'hargoù o-doa dibabet er geoded vreizhek. ■

Paol ar Meur



SONDAJ E BREIZH

Istor meur a strollad bihan (-tre) ganet e Pariz eo. Peurliesañ e tiwan al luskadoù bras diwar strolladoù bihan eus Pariz, a-drugarez d'al lañs roet dezho gant ar c'hazetennoù, gant an tele a-wechoù. Le Figaro a ray e-giz Le Monde evit strolladoù bihan a-vennozh ganti.

Evit pep tra eo patrom ar c'harioù bras a dalvez. Peurliesañ eo reizh an doare-jediñ, ha ma vefe Breizh emren hor befe stav ul lagad, pe ur skouarn troet war-du Pariz, Londrez pe New-York.

War ur c'hraf hepken eo direizh a-grenn an doare-jediñ: an emrenezh. Rak houmañ n'hell ket genel e Pariz. Evit an emrenezh eo ar rannvroioù-penn, -broioù bihan staget ouzh ur vro vras peurliesañ, a zo ar "gêrbenn". E Bro-C'hall, evit pezh a sell ouzh an emrenezh, eo Breizh pe Korsika hag a zo "kêrioù-penn" !

Distroomp da Vreizh. Ha gwelet ez eus bet O.F. (Ouest-France) o kinnig he fajenn "Opinions" da izili an Em-sav ? Ha goulnet eo bet e ali diwar-benn emdroard ar Deska-durezh digant prezidant Diwan ? Ha goulnet eo bet e ali diwar-benn an doare-mouezhiañ digant rener an UDB ?

Morse. Piv a gomz eus kudennoù Breizh ? Ar goskor rannvroel. Evit lavaret petra ? Evit lavaret e ranker sevel un hent ekonomikel bras Breizh-Veur/Breizh /Bro-Spagn. Pebezh nevezinti ! An hent-se ez eus anezhañ abaoe ar ragistor. Evit lavaret petra ? Evit lavaret e tle Breizh kenlabourat gant ar rannvroioù gall amezeg dezhi. Pebezh nevezinti ! Abaoe m'emaomp war an tamm ledenez-mañ e kenlabouromp ganto. Evit lavaret petra ? Evit lavaret e tle "Bretagne" ha "Pays de Loire" kenlabourat war dachenn an dourestelezh. Pebezh nevezinti ! Atav hon eus embanet e oa hervez reizpoell an ekonomiezh d'erc'hel da Vreizh unvan.

Ar re-se hag a zo, sañset mouezh an holl a lavar pezh a

lavaromp... gant 25 bloaz a zale. Kouz eo goulnet hon ali diouzhtu.

Ne reer ket avat. Perak ? Eeun eo ar wirionez. Na c'h'het e vez d'an emmerien un nan eus gwirioù diazez an emmer-kratelezhioù : ar Gwir da gomz.

En ur vro e talc'h ar stourmad politikel etre pep mouezhiadeg war bannoù ar c'hazetennoù. Aze e c'hourenn pep luskad mennozhioù gant ar mennozhioù all, aze e keñ gant mennozhioù nevez. Spisaet e vez ar goulnennoù, kardarnaet ivez.

E Breizh, evit pezh a sell an emrenezh, n'eus nemet ar virourien (a gliz pe a zehou) o deus ar gwir da reiñ o ali.

Kinnig a reomp danvez-dilennidi goude-se. Dianav int. Dianav eo o mennozhioù. Perak evote Breizhiz evito ? Penaos e c'hellfe hor mennozhioù bezañ dedennus pa chomont da louediñ mizioù-pad etre pep mouezhiadeg ? Penaos zoken e c'hellfe pep den kaout mennozhioù pa ne c'houlenn kazetenner ebet hon ali.

Alese e teu ar feulster. Daoust d'ar pezh a embaner alies, ne glask ket ar feulster e Breizh kemer plas ar votadegoù. Ur respont eo d'ar berzh lakaet war hor mennozhioù etre pep mouezhiadeg.

Gwashoc'h e oa e Korsika, pa oa falsaat an dilennadegoù. Gwashoc'h e oa ar feulster ivez.

Reizh eo an dilennadegoù e Breizh. Met pa seller pizh ouzh ar c'helaouñ eo anat n'eo ket gwelloc'h e stad du-mañ eget hini ar votadegoù e Korsika. Ha pouezus-tre eo ar c'helaouñ evidomp, rak n'eo ket 60 000 den hon eus da dizhout, e-giz e Kanaky, na 160 000, e-giz e Korsika, hogen 3 200 000 !

Rannet-disrannet eo ar c'helaouñ breizhat : galloud ar c'hlanioù eo. N'eus nemet FR3 hag Ouest-France o c'holeiñ Breizh a-bezh. FR3 a zo renet e Pariz, dalc'het strizh e vez warni, ha n'eo ket bemdez e vez.

ST ALBIN 1488 - 1988



mpet d'ar gazetennerien argant a-walc'h da vont er-maez eus Roazon. Ouest-France, e-giz TF1 pe Canal +, a zo un embregerezh prevez. Hec'h-unan emañ, ha bep vro e pleg d'ar galloud e plas: hag ur gazetenn araokour oc'h enebif, ur c'hempouez derast etre ar c'helaouñ prevez hag ar c'helaouñ foran.

N'eus ket e Breizh, hep farsal, diazez ur c'helaouñ demokratel : ur gazetenn virour hag ur gazetenn araokour oc'h enebif, ur c'hempouez derast etre ar c'helaouñ prevez hag ar c'helaouñ foran.

Un dra vat eo kinnig danvez-dilennidi. Ur stourm demokratel all hon eus da ren avat: hini ar gwir da gomz. Ar gwir da gomz diwar-benn pep tra hon eus e Breizh, ar gwir da gomz diwar-benn an emrenezh hon eus, da vichañ, e Bro-C'hall.

Paskal Ar Marc'heg

KLASK LABOUR
Klask labour a ra ur paotr 27 vloaz dezhañ, Brezhoneger mat, graet studioù war ar mererezh pellgomz 98.20.21.63.

ERRUET EO DEIZIATAER 1989 !
Goulnet bus er stal-man...
DEIZIATAER 1989, ur benveg labour gant e-leizh a ditouroù talvoudus evit an holl
8, STRAED HOCHÉ
35000 ROAZON
(99) 38.75.83.

Ar bloaz-mañ e lided e St Albin an Hiliber, 500-ved bloavezh an emgann spontus a voe trec'het ennañ arme ar Vretoned en desped da glo- negezh ha da aberezh 6 000 brez- zelour, muioc'h eget an hanter eus an emgannerien, un niver bras-spontus evit ar mare.

Ar faezhadenn-se a voe dleet, muioc'h eget da niver brasoc'h ar soudarded c'hall, d'an diouer a unanizezh e-touez pennoù arme Vreizh, ha d'an arme a youl vat a oa oc'h enebif ouzh soudarded a-vicher.

Tud a souezho gant lid ar faezhidigezh-se he deus degaset da Vreizh koll he dizalc'hded. Met ur faezhidigezh enorus e voe. Dre zibab mervel en ur stourm kentoc'h eget tec'hout pe emzaskor, o deus miret ar soudarded vrezhon hag o c'hens- stourmerien, enor priziuz ur Bobl a nac'h plegañ da nerzh an alouber, evel ur flammenn a zev a rumm da rumm e kalon ar re gadarnañ ac'hanomp ha na vo bi- ken lazhet gant hon enebourien, evel an ezhomm a frankiz a vev er pobloù a nac'h mervel.

Ar vroadelourien, etre an daou vrezel diwezhañ, o doa komprenet an emgann evel-se. Ha bep bloaz e teuent da gemer nerzh ha youl war an douar sakr mañ.

Tamallet zo bet da gêr Sant Albin bezañ graet gouel, pa ne oa d'ober nemet lidoù-kanv. Evidon eo direizh ha di- dalvoud an tamalloù-se. Rak graet int gant tud n'o deus graet mann, den ebet an emsav n'eus deus graet tra, nemet tud "KOUN BREIZH" evel just.

Met Sant Albin hag an tro -war-dro, ha Breizh en he fezh, o deus tennet gonid eus oberezh Kuzul-kêr.


Dizoloet he deus ur Bobl hec'h Istor. Savet ez eus bet ur monumant d'ar Vretoned mar- vet en emgann ha chom a ra tud a-sav dirakañ.

Skoazellet eo bet emban- nadur un "Istor Sant Albin" gant hini an emgann, a zo bet prenet a-leizh gant tud ar vro o deus adkavet eñvor un tremen- ned bepred bezant ha bev.

Kement-se ne vije ket bet tu d'ober hep skoazell an ti- kêr. Tud Sant Albin o deus kemeret perzh en abadennoù c'hoar- iva da lidañ an darvoud gla- c'harus-se eus Istor Breizh, a voe o istor-int da gentañ penn. 200 c'hoarier a oa, ha miliadoù a dud diwar-dro a oa deredet.

Evidon n'eus mar ebet e vo eostet en dazont ar pezh a zo bet hadet en deizioù-se.

Yann B.d.B.



LIZHER DA C'HARAN AR MEUR

Garan, keneil ker,

Kaer an eus klask, ne welan ket perak e vages ken bras kasoni bepred ouzh an Iliz Katolik. Balc'hmat e verez o komz diwar-benn an droug he dije graet, da skouer pa vez anv ganit eus trevadennerezh, gwaskezh ha gevrierezh. Moarvat evel e pep kevredigezh amparet gant tud ha pec'herion, ez eus bet gwech an amzer fazioù, hogen, dre vras, ha dreist-holl hiziv an deiz, ez eo diaes sellout ouzh an Iliz hag ar veleien evel ur bagad forbaned. Gwech ebet ne ziskouezez ar mad bet graet gant tud a feiz, (hag ar re-mañ ned int ket holl beleien -rak an Iliz n'eo ket urzhaz ar renerion hepken, hogen hollad ar gristenion da gentañ). Morse ne gomez diwar-benn eneoù kaer hon amzer na vez ket kalz anezho en diavez eus an Iliz evel:

-Maksimilian KOLBE bet kemeret gantañ lec'h un tad-tiegezh a vije bet lazhet a-hend-all gant an nazied. Al lean-mañ a roas e vuhez evit e gompagnun kamp-bac'h.

-Marsel CALLO, ar Breizhad yaouank eus Roazon, hag e geneiled, bet lazhet evit o feiz ivez gant an nazied. Ya, distrujet dre ma oant RE GRISTEN, gouez d'an SSeo o-unan !

-Al leanez anvet Mamm TEREZA, un Albanadez anezhi, oc'h ober war-dro an dud naoniet en Indez

-Al leanez anvet Soeur EMMANUELLE, ur c'hallez anezhi, oc'h ober war-dro ar vugale baour a vez o klask boued war bernioù teil Cairo en Ejipt ha re broioù all.

-Ar beleg anvet l'abbé PIERRE, diazezer Strollad Emmaus, bet saveteet gantañ endeo kement a davanteion ha betek COLUCHE, Doue d'e bardono !

-An daou veleg breizhat GOURIOU ha CAMIO, bet toullbac'het e Brazil, dre ma tifennent, en anv o feiz kristen, ar gouerion gaezh heskinet gant perc'henned vras didruez.

Na hir e c'hallfe bezañ ar roll, graet gant tud izelek, na gomez nepred diwar o fenn!

Degas DIDEROT ha VOLTAIRE dimp evel skouerioù sklerijen-nus evit Breizh ha moarvat, -a soñjez-, evit ar bed, zo mat marteze evit ar re a zo troet hiziv da lidañ an Dispac'h Gall



da lavarout eo taol-sponterezh 1789 bet lazhet gantañ, adal ar vi, an DISPAC'H GWIRION a oa krog e Breizh endeo bloaz araok. Ha chalet e vije bet DIDEROT ha VOLTAIRE, hemañ ur bourc'hiz bras anezhañ, gant spered Breizh o tispac'hañ ? Pelec'h emañ ar c'haouiaded ?

Kement ha degas ar prezeg bremañ war gudennoù skiantel, komzomp, mar karez, diwar-benn Liñsel dTORINO (Turin), rak studiet em eus an anadenn-mañ dre ar munud. Krediñ a ri pe ne riket, hogen n'eo ket ken eum an traoù amañ ha ma hañval dit !

Mard eo bet miret al liñsel betek-henn, n'eo ket evit kuzhat ur "gao" bennak an hini eo, hogen dre ma chome, -ha ma chom bepred zoken war-lerc'h disoc'hoù ar c'HK 14-, kalz kevrinoù da studiañ ha da "glask" displegañ. Daou levr skiantel gwirion zo bet skrivet : unan gant ar Saoz Ian WILSON. "The Shroud of Turin", embannet e Paris er bloaz 1978 hag egile gant Kenneth E. STEVENSON § Gary R. HARMAS, anezho Amerikaned o tanevelañ an arnodoù bet kaset da benn e 1978 war al liñsel.

Sed amañ ar pezh a zo diazezet mat bremañ gant ar skiant :

1. Ar merkoù a zo war al liñsel n'eus ket livadurioù dezho. Petra int neuze ? Den na oar c'hoazh.

2. Gwad den a zo bet kavet war al liñsel, war-lerc'h diella fennadur skiantel. Mar ne faziñ ket, er grennamer ne vete mui kroazkrouget an dorfedourion, da vihanañ er 14et Kd.

3. Teirmentek eo ar skeudenn, tra iskiñ evit krennameriz beuzet en diouiziegezh hag en deñvalgagarouriezh.

4. An arzour en dije savet ar skeudenn e vije bet ret dezhañ stummañ ur ginlun (image négative) peogwir pa oa bet luc'hskeudennet al liñsel e 1898 gant SECONDO PIA, hag en o lenel e blakenn diouzh an diskulgebil, e verzhias e oa ur reizhlun (image positive) e gwirionez ar ginlun e oa engrotoz kavout !..Peogwir ne c'halle ket oberer ar skeudenn, hag en o vevañ er grennamer, gouzout e vije bet dizoloet al luc'hskeudennerezh 600 vloaz diwezhatoc'h, n'eus tud ebet da gompren seurt kevren. Penaos eo bet treset merkoù ginluniek ar skeudenn ? Prouet eo bet ivez gant ar ouiziaded ne c'hall ket ar merkoù dont, lakaomp diwar un delwenn houarn bet tomnet, ma vije bet peget al liñsel warni. Penaos c'hoazh e vije bet teirmentek bepred ar skeudenn d'ar c'houiz-se ?

Kaer zo huchal : ar skiant ! ar skiant ! Labour a chom c'hoazh d'ober war galz a dachennoù evel roù Liñsel dTORINO, rak diwerc'h e chom ar speredoù lemnañ dirak seurt marzhoù. E meur a geñver eo distremenet spered skiantelour an 19et Kd a seblant ren war da empenn ha n'eo ket gantañ e vev avenet, pell ac'hano, gouezoustezh an dazoned. Krog eo studierion yaouank Rusia, ur bern anezho, da vezañ heuet gant ar varksouriezh, skuizh-marv ma int gant an danvezelouriezh digristen ha dizoue. Ha setu perak e weler kement anezho, lusk ket gant un nerzh kuzh kevriniek, o tarempeñt adarre llinnel, o zadoù. Kement ha ken bihan ma eo darn krog da soñjal eo ganto e vo nevezet ar Feiz e Broioù ar Reter hag adunvet an Iliz dre Europa en he fezh, adalek Brest betek Tcheliabinsk.

Gant va gwellañ soñjoù. Jil Ewan

RELIJION OFERENN VREZHONEK

GANT ARGAD

A-benn bremañ ne gaver ken a oferenn vrezhonek reoliek d'ar Sul e Breizh ! An oferenn vrezhonek reoliek nemeti lidet d'ar Sul, a zo aet d'an traoñ nevez 'zo e Brest. E 1928 e veze lidet an oferenn en hor Yezh e pep lec'h nemet ar c'herioù bras. (Gwelout en klask Roparz Hemon, Gwalarn). Tri-ugent bloaz war-lerc'h ne chom hini ebet ken eta.

PIV A ZO DA DAMALL

D'am meno ez eo en abeg n'o deus bet aon kargidi eskopti Kemper ha Leon rak bezañ kemeret evit "Breizh Atao-viz" ha neuze bezañ gwelet fall ha gant ar Prefed ha gant ar boblañs hec'h unan - o vezañ ma felle dezhi cheñch yezh a-benn gelout kemer perzh er gevredigezh a vremañ - e vo degemeret gant skritur ar chaloni Falc'hun, an den-se o tennañ pep talvoud dezegh vroadel d'ar yezh : perak eta o dije kendalc'het gant an oferennoù e brezhoneg ?

E lodenn vrezhonek eskopti Sant-Brieg ez eas war zigresk an oferennoù brezhonek, diwar ar menez abegoù, nemet hini ar skritur, a voe difennet ken tær ha dibleg gant an Ao. Klerg, Ar Floc'h, Lec'hvien, Ar C'halez... Muioc'h a fran-kiz a oa gant beleien an eskopti-se en o farrez, eget gant beleien-emsaverien Penn-ar-Bed a gav din. Parrez Bulien, dalc'het gant an Aotrou Klerg a voe ar barrez diwezhañ o vont en-dro e brezhoneg penn-dabenn. Raebet e voe dezhañ an dra-se rak ma oa mat e emalc'h e-keñver ar yezh, ne oa ket ma kenderc'hel da ober gant ur yezh a oa deuet da vezañ estren d'an dud boutin, e-keñver buhez speredel, o vezañ ma vevent e-giz an holl e Breizh e mor ar gallek. Anat eo ne c'helle an Aotrou Klerg dedennañ da vat nemet emsaverien, ar pezh a c'hoarvezas, dre c'hras Doue.

E Roazon e voe savet un doare parrez vrezhonek gant emsaverien dreist-holl, gant bennozh ar c'hardinal Gouyon, a welas ne romp ket un dalvoude-



a-gleiz da zehou Ao.Klerg, Ao.Dubourg, Gi Etienne,Vetig an Dred F.Kervella

gezh folklorel d'ar yezh : brezhonegerien desket e oa eus tud an oferenn-se. E-pad pell amzer e padas an oferenn-se e Chapel Sant-Marzhin Roazon, bep sul kalvar, ha tremevan an Aotrou Barbotin. Dre ziouer a veleg e chomas a sav eta hag e adkrogas a-drugare d'an Aotrou Chardonnet (an istorour), a ra an hent bep miz eus Pont-Meven da Roazon evit ar gumuniezh kristen-se, diveleg. Bep sul kentañ ar miz eta, da 11 eur, e vez c'hoazh an oferenn e Roazon, e Chapel Sant Marzhin.

DIQOUER A VELEIEN... HAG A FIDELED

Distroomp da Vrest. Frammetoc'h eo an emsaverien gristen e Brest, a-drugare d'an Ao Souffez, ur roc'h ma 'z eo ken-koulz war doent ar relijion, ha war dachenn ar stourm evit ar yezh hag ar vro : en-dro da OALÉD SANT ERWAN, ez eus eta e Brest ur vuhez vrezhonek awenet gant spered an Aviel. E-pad bloavezhioù ez eus bet stourmet evit kaout un oferenn e brezh-

neg bep sul. Er penn-kentañ e teue kalz a dud d'an oferennoù, met div wech ar miz nemetken, pa rank ur c'hristen mont bep goulenn, gant doujañs hag az-goulenn, gant doujañs ha resped ouzh an eskob, e voe roet asant d'an oferenn e brezhoneg bep sul e parrez sant Marzhin, ha klenket e voe e Chapel sant Paul straed Touro, d'ar Sul vintin etre an oferenn c'hallek hag hini Sant Pi V, aotreet ivez gant an eskob, daoust ma ne blij ket dezhañ doare bourc'hiz ar fideled-se a-hervez. "Chapel an istrogetell" a-benn ar fin. Siwazh, ne voe ket tud da genderc'hel gant an oferenn-se dre ma voe re izel niver ar fideled a zeu. Digaloneket e voe ar beleg a lide an oferenn-se abaoe bloavezhioù, gant prezegennoù uhel-mat o live, ar pezh n'eo ket anat da ober e brezhoneg evit c'hoazh. N'eo ket dre ziouer a vruderezh eo chomet asav an oferenn-se. Evel ma'm eus merket uheloc'h ne c'helle dedennañ nemet an emsaverien forzh penaos. N'int ket deuet: gwazh a-se evite hag evit an Aotrou Doue !

Notenn d'ar Merc'her da 6 eur 30 noz ha d'ar Sadorn da 8 eur 30 noz e vez lidet an oferenn c'hoazh e Brezhoneg e presbital Trelevenez.

kentelioù noz

ROAZON

Kentelioù brezhoneg a vez aozet gant Skol An Emsav e Roazon, adalek penn kentañ miz Du evit an deraouidi, an eil, trede ha pevare bioavezh. Ar c'hentelioù-mañ a vez graet d'al Lun, Meurzh, Mer-c'her ha Yaou da 6 eur pe 8 eur noz. Evit kaout titouroù pellgomz d'an niverenn 99.38.75.83.

LAVAL

Kentelioù brezhoneg a vez aozet bep lun gant Skol Erispoe e Laval etre 6 e. hag 8 eur diouzh an noz e Maison des Associations, plasenn Sant Tegal. (53000) Bro Mayen.

ENEZ GROE

Kentelioù brezhoneg a vez aozet gant Kelc'h Bleimor Roet eo bet deomp an niverenn-mañ : 97-05.84.87. ■

LANESTER

E-giz bep bloaz e vez aozet gant kevredigezh an **DASTUMERION** kentelioù brezhoneg a-bep seurt live. Pellgomz d'an niverennoù da heul : 97-76.62.44. -pe- 97-76.76.48 ■

PLANVOUR

Gant Mignoned Breizh ha Tud er Mor vez aozet kentelioù noz e Ti Sonerezh Planvour. Bez e c'hellit kaout titouroù o pellgomz d'an niverennoù-mañ : 97-33.76.02, pe, 97-82.78.33 -ha- 97.83.27.17. ■

BREST

Aozet e vez kentelioù brezhoneg e Brest gant OALED SANT ERWAN, 28 straed Ch. Berthelot d'ar meurzh da 7 eur evit an deraouidi, d'ar merc'her da 2 eur 1/4 evit ar vugale ha da 6 eur 1/4 evit en em varrekaat. D'ar Yaou da 6 eur evit an deraouidi ivez. N'eus ket bizioù nemet evit prenañ al levioù ret. Digoust eo ar c'hentelioù.



GERIOU KROAZ

GERIOU KROAZ MIZ DU 1988

| | I | II | III | IV | V | VI | VII | VIII | IX |
|----|---|----|-----|----|---|----|-----|------|----|
| 1 | | | | | | | | | |
| 2 | | | | | | | | | |
| 3 | | | | | | | | | |
| 4 | | | | | | | | | |
| 5 | | | | | | | | | |
| 6 | | | | | | | | | |
| 7 | | | | | | | | | |
| 8 | | | | | | | | | |
| 9 | | | | | | | | | |
| 10 | | | | | | | | | |

A-LED

1. Pouranadenn -
2. Kleñved - Loned stag -
3. Roused - Araogenn (staget) -
4. Marevezh -
5. Notenn - Evit stagañ -
6. Eus ober - Dibaoe - Raganav-gour
7. Ee goshañ - Ger-sell -
8. Ger-sell - 'No bod - Pep hini en deus unan -
9. Tost - Choaze -
10. Ret evit chom bev -

A-SERZH

- I. Soniâ -
- II. Korf-eskern - E-kichen Doue -
- III. Gouelioù - Rannig-diskouez -
- IV. Dibenger - War ar maez -
- V. Strollad rock a Naoned - Sot -
- VI. Tereon - Rakger - Eus ar yar -
- VII. Pied - Spont -
- VIII. Chalasant -
- IX. Hopal -

RESPONT GERIOU KROAZ MIZ HERE 88

| | I | II | III | IV | V | VI | VII | VIII | IX |
|----|---|----|-----|----|---|----|-----|------|----|
| 1 | H | E | B | R | A | E | G | T | |
| 2 | E | O | A | L | A | R | O | | |
| 3 | G | R | A | E | A | E | S | | |
| 4 | A | F | E | S | T | E | | | |
| 5 | R | U | D | O | T | A | N | | |
| 6 | A | V | U | U | F | E | R | N | |
| 7 | T | E | S | T | E | V | | | |
| 8 | L | T | E | R | E | Z | A | | |
| 9 | L | F | I | N | N | O | Z | | |
| 10 | U | A | V | O | N | V | | | |

Ar miz tremenet ec'h embannemp keleier eus kevredigezhioù brezhonek an Alre, Gwened ha Roazon. Klask a reomp gouzout ha mont a ra en dro seurt kevredigezhioù c'hoazh e Lannuon, Gwengamp, Sant-Brieg e...evel un nebeud bloavezhioù zo. Trugarez da'n izili a gasfe dimp doareoù. ■

BREMAN NIVERENN 86

MIZ DU 1988

TAOLENN

| | |
|------------------------|----|
| Lizhiri..... | 2 |
| DEUG Brezhoneg..... | 3 |
| Felice Tomasi..... | 3 |
| Skolaj Diwan..... | 4 |
| FR3 ha M.Treger..... | 4 |
| Rocard e Roazon..... | 5 |
| Stourm ar Brezh..... | 6 |
| Berr ha Berr..... | 7 |
| Karta Europa..... | 8 |
| Frankiz Breizh..... | 9 |
| Taolioù Pluenn..... | 10 |
| Radio..... | 12 |
| Kemennadennoù..... | 13 |
| Sondaj e Breizh..... | 14 |
| Sant Albin..... | 15 |
| Lizher da C'haran..... | 16 |
| Relijion..... | 17 |
| Kentelioù noz..... | 18 |
| Dudi..... | 18 |
| Pajenn ar vugale..... | 19 |
| MESK-DIVESK..... | 20 |

Pennadoù gant U.G.B. M.K., Tangi Louarn, SAB, A.V.C., Paskal ar Marc'heg, Paol ar Meur, Mikael Madeg, Yann Leskildri, Y.B. du Bourg, Jil Ewan, Argad, T.G., Mich Beyer, Garan ar Meur.

Maketenn gant Nolwenn Louarn, Jil Killeverer Lena Louarn.

Tresadennoù gant Malo Louarn, Mich Beyer.

Luc'hskeudennoù gant Lena Louarn, O.F., La Vie, U RIBOMBU.

RENER : Mikael Baudu, Moullet e ti O.S.C.R. Tachenn Meurzh Roazon.

Embannet gant skoazell ministrerezh gall ar venadur ha Kuzul Breizh ha lennerien BREMAN.

Kasit ho pennadoù pe keleier araok ar 4 a viz Kersu 8 straed Hoche Roazon.

PAJENN AR VUGALE

Nozvezh ar pellgent eo.
O c'hortoz ar c'had Nedeleg...



... emañ Jobig. En e gichen emañ e vi bihan.



Setu ar c'had Nedeleg o tont war e gornigell leun a brofoù...

Yen eo an amzer. Met setu al loa o sevel. Pegen brav!




Deomp da guzhat a-dreñv d'al lapin Nedeleg!



Pegen brav eo gant e garlotez-annoù hag e c'houlennaouennoù!



Petra zo bet degaset din? Deus da welet, ma vi bihan!



MESK

DIVESK

B LUNDERING INTO DISASTER", al levr bet skrivet gant Ministr kozh armeoù U.S.A (Mac Namara), da vare ar brezel gant KUBA, a zo bet embannet un droidigezh anezhañ e 1987 dindan an talbenn "Plaidoyer, prévenir la catastrophe nucléaire" (Hachette). Goude bezañ bet mestr ar brasañ niver a donennoù nukleel e teu Mac Namara war e giz en ur skrivañ e tlefer mont kalz pelloc'h gant politikerezh digreskiñ an armoù. Betek-hen, emezañ, an emglev etre REAGAN ha GORBATCHEV a zivout ar fuzeennoù etre a dalv kement ha 3 % nemetken eus nerzh nukleel ar bed, hag e chom 12000 "penn" nukleel prest da servijout a-bep tu (US hag URSS) tra ma zo un 50 000 bennek all en arsanailhoù ! ■

D'ar 27/4/87 eo en em lazhet Valery LEGASSOV, daou vloaz war-lerc'h TCHERNOBYL, abalamour d'ar giriegezh a oa war e chouk er gwallzarvoud. Araok an emlazh en deus skrivet : *"Bet eo bet Tchernobyl uhelboent fallrenerezh an embregerezhioù nukleel e-pad degadoù a vloavezhioù... Bis-koazh n'em eus gwelet un aozadur soviedel o studiañ pizh surentez ar c'hreizemmoù..."* (e-barzh ar PRADVA d'an 20/5/1988)

Da betra e servij bremañ an 3000 km² kontammet en-dro da greizenn Tchernobyl hag an 2000 km² difennet ouzh an dud ? Da sevel studia-dennoù diwar ar c'hennmadurioù degaset d'ar plant gant ar skinoberiantiz. Hervez skiantourien 'zo en URSS, e tlefe kreskiñ kalz buannoc'h darn anezho, evel ar gwez pin, deut en o ment dindan 15 bloaz e-lec'h an 30 a vez ret peurvuiañ.

En dachenn difennet e vo studiet emdroadur al loened, laboused ha pesked, ha loened an antantoù dieubet.

Da dachenn "naturel" zo bet anvet an tolead-se gant ar

soviediz hag an UNESCO. Evit araokadennoù ar skiant, perak ne vefe ket lezet un tiegezh en un endro ken naturel ? ■

E 1978 e oa kouezhet al loa -rell KOSMOS e ti an INUIT e hanternoz KANADA (e tro lenn ar Sklaved). E penn miz Here e oa an holl o c'hortoz an eil KOSMOS 1900, profet deomp gant ar stad Soviedel, e-vidomp da dañva ouzh sokialouriezh blaz GORBATCHEV. Siwazh, n'eo ket deuet betek ennomp : ar penn nukleel anezhi a zo bet dalc'het e-tro d'an Douar (720 km), hag an tammoù all a zo bet distrujet an darn vrasañ anezho en ur erruout en aer. Dinec'het an dud, peoc'h war an douar.

Me 'garje vije kouezhet ar c'h-Kosmos daonet war ur ger vras Europ pe Amerika, ha kontammet ur bern tud gant ar skin-oberiantiz. Dre ma talvun Amerikan hag un European muioc'h eget un INUIT, marteze ne vije ket diefed an darvoud war ar politikerezh etrevroadel e-keñver implij an nukleel en armoù pe er c'hreizemmoù.

A rabat din fallgaloniñ memestra. N'eo ket posubl ne c'hoarvezfe ket ur gwallzarvoud ur wech bennak gant an 12 000 tamm hag ar 1762 loarell o treiñ en dro d'an douar er mare-mañ, etre 130 km ha 36 000 km : ur fuzeenn a 1000 tonenn a zavez skinoberiant, danvezioù kenderc'het gant al labouradegoù armoù ha gant ar c'hreizemmoù, a zo bet bannet e miz Gouere diwezhañ ivez, a-gevret gant an USA hag an URSS. N'eus ket bet kement a vrud d'an darvoud hag en-dro d'un ARIANE. Mont a ra war-raok an emglev etre an div vro vras evit kas da benn an trec'h war an natur hag an denezh. ■

E-pad 20 vloaz eo bet saotret an endro gant ul labouradeg armoù nukleel en U.S.A. (Stad Ohio), dindan pae-roniezh ar Stad. E miz Genver diwezhañ nemetken eo bet embannet an dielloù diwar gwallzarvoud nukleel WINDSCALE (dirak enezenn MAN) e 1957.

E 1986, eo bet lakaet ar greizenn PALUEL da vont en-dro hep an aotreoù ret gant ar Stad ha d'ar meurzh 17 a viz Du 87 eo bet bombezenet kreizenn nukleel BOUCHEHR en Iran gant an Irakiz. ■

K oshaat a ra ur c'halz eus ar 46 tamm kreizenn nukleel bet strewet e Bro-C'hall, meur a hini anezho o vezañ aet en-dro ouzhpenn 70000 eurvezh. Toull e teu da vezañ un darn eus o c'horzennoù ye-naat.

N'eo ket gant batimantoù eoul-maen nevez-flamm eo c'hoar-vezet meur a lanv du, gant ar re goshañ ne lavaran ket. Ar gwallzarvoudoù nukleel brasañ a zo dirazomp.

War-dro 350 milion a labour evit nevesaat pep kreizenn d.l.e. 6,8 miliard a lurioù a-hed 20 bloaz.

Diouzh un tu emañ prest ALSTHOM da lammat war ar marc'had. Diouzh an tu all emañ EDF o klask mirout ouzh an dispignoù. Etre an daou, ar paour kaezh tud... ■

4 O perzh fall a zo bet kavet e kreizenn nukleel BATAAN en bro FILIPIN. Divizet eo bet gant Cora AQUINO ne yafe ket en-dro.

Kreizenn nukleel ARMENIA a veze goulennet e vefe serret, gant manifesterien EREVAN ; a vo serret e 1991. Div greizenn all a vo dilezet e LITUANIA hag e BIELORUSIA.

Kreizenn nevez-flamm SHOREHAM (e Stad New-York) a vo dismantrt dizale. Kreizenn SEA-BROOK (en New Hampshire) a c'hellfe bezañ arsavet ivez. Ur referandom a vo a-zivout reoù Rancho Seco ha Pigrim e KALIFORNIA ha MASSACHUSETTS. Ha 5 keflusker nukleel en TENNESSEE a zo chomet dizimplij abaoe 85 abalamour d'an diouer a surentez.

Met EDF a gendalc'h gant e lañs davet an Araokaat hag ar Skiant. Klask a ra adarre lakaat Super Phenix da vont en-dro er mare-mañ. Er Stadoù Unanet e vez kenderc'het 14 % eus an tredan gant an nukleel, 70 % er Frañs.

Ger-stur nukleerien PARIS -ma c'hoarvez d'an den faziñ ar gwellañ doare da zont a-benn eus e laoskentez a zo krouiñ ur bed heptan. ■